

BONED RUZ HA TORR E BENN !

An holl a oar mat penaos e oa bet freuz ha reuz er vro a-bezh e 1675 : ar Bonedoù Ruz a-enep d'an Dragoned. Dragoned ar Roue Loeiz, gwisket en ruz. Ruz a-enep ruz.

Moarvat eo gante eo bet awenet troienn gwrac'hed kozh Treger Vihan, ar reoù am eus anavezet gwezhall, pan lârent « gwelet 'm eus kezeg ruz evit an noz » pan oa un dismantr spontus bennaket da dont, hervez. Marteze e teu deus un darvoud all, met ne vern : an dud er vro a oa bet merket don gant an diaouloù ruz pignet war gezeg na oant ket kezeg labour na kezeg servij, hag a lakae o sabrennoù da droiata a-us d'o fennoù a-raok troc'hañ pe dornoù pe brec'hioù pe c'hoazh dibennañ unan bennak re hardizh da huchal a-enep dezhe. Liv ruz war liv ruz.

Merket ivez gant an dud krouget er gwez a-hed heñchoù kammdroiek maezioù Breizh. Boued evit ar brini. Ruz war du.

Flaer ar mement, dour-gwad o lakaat milinoù ar vro da vont, hervez ma lavar an diouganoù kozh. Ne lârin seurt diwar-benn abegoù ar reuz-se, micher an istorourien an hini eo, hag uhel eo ar berniad levrioù skrivet gante diwar-benn ar pezh a c'hoarvezas neuze. Sellit ouzh ar roll e dibenn ar gromikenn. Just ur meneg bennak da displegañ ar ganaouenn roet amañ dindan, ur ganaouenn diwar-benn donedigezh dileuridi ar Roue da Vreizh.

Ar ganaouenn-se he deus hec'h istor dezhi ivez...

Arthur Le Moyne de la Borderie zo bet un istorour brudet evit e labourioù niverus war istor Breizh.

Herie an dez ne vez ket mui ken priziet gant an istorourien. Ya, rebechet e vez outañ bezañ bet romantel, roueelour, broadelour breizhat, ha traoù all moarvat. E 1884 en devoa implijet ar ganaouenn da sikour displegañ petra a oa bet emsavadeg ar Bonedoù Ruz. Ha setu lakaet diskred war ar ganaouenn : dastumet gant Kerambrun en Prad ! Soñjit 'ta, an den a oa bet lakaet da drucher, da saver pezhioù faos gant e genderv Fañch an Uhel : an Uhel n'en devoa ket kavet ar memes tra, sede e oa faos. Un tammig berr ! Un doare da lakaat diskred war dastumad Pengwern hag a degemere ingal sikour Kerambrun...

Herie an dez eo gras da labourioù Michel Nassiet, istorour, a ouie labourat gant Donatien Laurent, etnoyezhour, e ouvezer eo un destenn wirion.

Kerambrun en devije profitet eus dianaoudegezh Pengwern war ar yezh. Pengwern ne ouie ket brezhoneg, hervez ! Evel m'en deus diskouezet Michel Nassiet eo gaou bras. Tre evel gaou ar reoù a dalc'h da lakaat krediñ ne ouie Kêrvarker (1815-1895) tamm brezhoneg ebet p'en devoa embannet e Varzhaz-Breizh kentañ e 1839, pa oa 24 bloaz ! Ha se en despet da labourioù skiantel ha pizh Donatien Laurent.

Tregeriz pan lennont « ar paper timbr » a wel penaos emañ liv brezhoneg o bro war ar skrid. An troiennoù, met ivez geriennoù evel "hursel". Sellit e-barzh Devri hag ho po respontoù.

Ar skrid am eus lakaet er skritur a-vremañ gant un nebeud notennoù da sklaeraat gerioù zo.

Herve Bihan

Ar paper timbr

1. Petra nevez zo en Breizh ?
Trouz ha moged zo a-leizh.

Marc'h ar Roue hag eñ kamm
Zo houarnet a-nevez flamm.

5. A c'ha da gas en Breizh-Izel
Ar paper timbr hag ar siell.

C'hwec'h Kabiten 'n'eus roue Frañs
Tudjentil vras, tud a noblañs.

10. C'hwec'h Kabiten 'n'eus ar Roue,
Da lakaat war e ankane ; ankane = inkane
- Daou war an dibr, daou war ar goûg,
Ha daou all tost da benn e chouk.
- Skañvañ arme 'n'eus Roue Frañs,
N'bouez ket kant livr 'n ur valañs ! livr = lur
15. Ar c'hentañ 'nê doug pavillon
Ha fourdelizenn ar poultron ; 'nê = anezhe
- An eil 'n'eus ur c'hleve melget
Ha na rey droug da den ebet ; kleve = kleze ; melget = merglet
20. An drede 'n'eus ur gentroù plouz,
Evit krafignat al loen lous ;
- Ar bevare 'n'eus div bluenn
Unan war e dog Kabiten
- Unan war e dog Kabiten
Hag un allig drek e skouarn,
25. Gant ar bempet 'ma'n drouklouzoù,
Ar paper timbr ar yalc'h c'houllo ;
- Yalc'h ar Roue don 'vel ar mor,
'Vel an ifern bepred digor.
30. An diwezhañ krog 'barzh al lost
A zo konduer d'ar marc'h post ;
- Pebezh harnez 'n'eus ar Roue !
Pebezh noblañs ! Pebezh arme !
- Na pa n'arrijont da gentañ
Gant paper timbret er vro-mañ,
35. 'Oant kempennet gant druilhòù,
Ha treut evel ar c'hozh delioù.
- O fri oa hir, o lagad bras,
O divjod gwenn ha kazi noazh,
40. O divc'har a oa bizhier kleud kleud = kloued
Hag o daoulin skoulmoù keuneud.
- Mes na oant ket bet pell er vro
Ma oa cheñchet hon c'hwec'h aotroù,
- Chupenn voulos pasamantet,
Loeroioù seiz hag i brodet,

